
CHANSON GOZ,

VAR SUJET PEDER VREG.

Var un ton divertissant.

SELAOUIT, hac e clêfot cana ur Ganaouen
Zo composet pell a zo da beder Feimelen ;
Zo composet pell a zo da beder seurt Grague ,
E calz eus a gontreou e caver aneze.

Bezit oll attantif mad da glêvet va c'homzou ,
Hac ho pezo plijadur o clêvet marvaillou :
Ar beder Vreg-màn a zo control an eil d'eben ;
Selaouit hac ententit , rac ne disrezàn den.

Ar Vreg-Vad eo ar guenta demeus ar beder-màn ,
A ra stad eus e fried , e deus soign anezàn ,
Pa zavo eus e goele abret d'ar mintin mad ,
Er golo eno tomic etouezic an dillat .

Ar Vrec-mâ a zo hepret soignus eus e friet ,
Da brepar' dezàn e lein abars ma vo savet ;
Ebars en ur scudellic pe ur podic bian
Vo laqet da vitona e qichennic an tâu .

Pa zavo oll dud an ty , arabat e vo dê
Ober trous , aon difuni an ozac'h er guele ;

Ret eo dê beza sioul bras epad ma pad ar pred,
Rac aon da geni'n ozac'h zo c'hoas anter-gousqet.

N'em dic'hourdi rai'n ozac'h neuze en e vele,
Digueri e zaoulagad da c'hout hac én vo de;
Neuze' visqo e zillat eno e plijadur,
Cetu savet an ozac'h mintin-mat a dra sur.

Ar Serjant-Greg eo goude, ne deus qet a rôson
Mui eguet en deus un tygr petramant eul leon,
Ha ne deveus qen sourci nemet destum mado,
Ne glêfac'h qet anezi o comz eus ar maro.

Pa zavo ar Serjant-Greg neuze deus e guele,
E qemero ur bisforc'h hac e yel da vale,
Evit guelet he farcou, he frajou tro-var-dro,
Ha mar cav ar zaout enne, ractal o bac'hato.

P'erruo ar Serjant-Greg a c'houde pourmeni,
Ha ma na ve qet savet servicherien he zy,
Neuze vezo e c'hlêvet o cana ur guentel!
Gant calz a leoudouet e ray dezo sevel.

Guell ve da ur servicher beza en ur prison,
Destumet hac amaret en eur bassefos don,
Egued beza oblijet da Vreg evel oumâ,
N'en deus qet a blijadur o ranc he servicha.

An Vreg-Arc'hant eo goude, bonnes zo suffisant;
Ne fell dei ober netra nemet evit arc'hant.
Qement e plich dei arc'hant hac ouspen-ze an aour,
Ne c'houlen ober netra james evit ar paour.

Pa zayo ar Vreg-Arc'hant da rei amann ha lès,
D'an dud a vezo ganti pe labourerien guès,
Neuze vo taillet dezo justa ma vo gallet:
Guell ve ganti caout arc'hant eguet repas reglet.

Hac e vec'h bet pell-amizer e ty an Arc'hant Greg,
Nos ha deiz o labourat, hep cessi ur momet,

Mar deut goude-ze da glasq un draic benaquet,
Ma noc'h eus qet a arc'hant et viot refuset.

Ar Vreg-Gougoul a Gundu tri autrou en he zy,
Ar c'henta eus aneze zo hanvet Diegui,
An eil a zo Goal-Fêçon, Luguden an drede :
Sellit penos e cundu ar Vreg e autrone!

Pa zavo an ozac'h qès a demeus e vele,
E lavaro d'e bried : sao alesse ive ;
Mes Diegui lavaro neuze e bêr gomzou :
Abret omp c'hoas da zevel, souchomp amàn hon daou.

Neuze' soucho an ozac'h coantic en e vele,
Hac e couesco Diegui gantân oc'h e goste ;
Credi rân a dra derten penos er barres-màn
E caset calz a C'hraguez zo hènvel oc'h oumâ.

Pa zavo ar Vreg-Gougoul neuze deus he guele,
Var digare qerc'hat tân e yelo da vale ;
Var digare qerc'hat tân pe un dra benaquet ,
E zai da gonta marvaill d'e c'hommer Guillemet.

Compagninez enorabl, bremâ oc'h eus clèvet
Disclêria en abrege buez ar beder C'hreg ;
Rac-se'ta, me ho suppli, dre guriosite ,
Da brena peb a gopi da stag' ouz ho cuele.

Nep en deus grêt ar Chanson a guelen ar re all
Ha gouscoude e-unan en deus lec'h da ziyoal :
E mà e ger bars danger ha ma ve den ebet ,
Gant aou na deuse deàn attrap ur Gougoul-Greg.

FIN.



DISPUT ETRE MOLARGE HAC AR C'HORAIZ.

Var ton Chanson ar Brezel.

Bonjour dêc'h-u, va Mignonet, joa ameus ouz ho cuelet,
Evit cana dêc'h un Disput pell-amzer zo composet,
Var ar sujet a Volarge hac ar C'horai's e zê grêt ;
Me ho suppli ta, Bretonet, da zonet oll d'e c'hlêvet.

MOLARGE.

Orça ta, eme Molarge, deut ez òu c'hoas en ho touez,
Evit joaussat calz a dud ebars er rouantelez,
E Breiz, ebars en Normandi, e qement provinç a Franç,
Evel ma ve deut Molarge, e ve calz rejouissanç.

AR C'HORAIZ.

Molarge a zo sur un den hac a gar ober cher-vat,
Hac e vrassa contantamant eo oc'h eva boudaillat ;
Un infami eo hac ur gourmant, carguet a voal exemplou,
Hac a laca calz dizurzou var ar mæs hac er c'hæriou.

Ar C'horai'z a zo un amzer hac a gar ar bidijen ;
Ne sell qet dezàn clêvet comz meus a dra fall a genn ;
Ar C'horai'z memes zo un den carguet eus a zantelez,
Evit sicou ar gristenien d'ober o zilvidiguez.

Ar C'horai'z a zo un den deut eus abers Salver ar bed,
Evit dont da burifia un den demeus e bec'hét.
Un den eo leun a vertuzion, liac a gar mad hon ene ,
Evit beza recompanset gant un Doue goude-ze.

Ha racse eta , Molarge, quitta buan ar c'hontre ,
 Rac certen te a zo un den carguet a impurete ;
 Da galon zo ive carguet a voal inclination :
 Capapl out da zaoni an dud dre ar vro e peb canton.

MOLARGE.

Bah ! ro peoc'h dìn-me , Coraiz ; te zo ordinaire trouz ;
 Te a zo un den disordren , hac atao ouz va gourdrous ;
 Te a zo un den scandalus , ha prest d'am brezellecât ,
 Balamour ma lacàn calz tud da eva , d'ober cher vad.

AR C'HORAIZ.

Nê qet ayoalc'h sur qemense , pa gomzes qen insolant .
 Hanvet mat ez out Molarge , rac ne ouzout qet parlant ;
 Te a zo un den intourdi , carguet a fallagries ,
 Hac a laca calz dizurzou ebars er rouantelez .

MOLARGE.

Roes-te peoc'h dìn-me , Coraiz , ha lezes-te da gojou ;
 Me bepret n'em divertisso , groignet an nep a garo ;
 Ne zispignàn netra da zen , me rayo d'am santimant ,
 Hac a rayo bepret cher-vat qeit ma pado va arc'hant .

AR C'HORAIZ.

Calz a dud a zo er bed-mâ a voal-dispign o danve ,
 Hac en em b̄qa e danger , siouas ! da goll o ene ,
 Pere a zo tud obstinet , caledet en o fec'het ,
 Hac a deu da anconac'hat Jesus-Christ , Salver ar bed .

MOLARGE.

Roes-te peoc'h dìn-me , Coraiz , scuiza rân ouz da glêvet ;
 Me fell dìn n'em divertissa bremâ gant va mignonet .
 N'emeus nemet daou pe dri de da chom assambles gante ,
 Mes varben daouzez mis amâ e teuùn c'hoas adare .

AR C'HORAIZ.

O Molarge , den milliguet ! me garfe e ves maro ,
 Evit na deufes birvigen davantach ebars er vro ;

Te a zo un den didruez bars en andret da ene :
Poent ê dit n'em gconvertissa, ha distrei pront oc'h Doue.

MOLARGE.

N'em gconvertis nepa garo, me ne dòn qet chagrinet ;
Me fell dìn n'em divertissa, oc'h ober cher-vat bepret.
Me a zo ur potr hep sourci, ha ne dòn qet chagrinet
Dac'hout piou n'em gconvertisso, racmenedòn qet presset.

AR C'HORAIZ.

Un dra derrubl eo, maleurus, e vez-te qen obstinet
Gant ar güin ha gant ar cheriou, den cruel ha diremet !
Te verit beza chasseet eus ar vro hac ar c'halter,
Dre ma zout un den libertin, un infam hac ur mevier.

MOLARGE.

N'en dê qet êru an termien dìn-me c'hoas evit quitât ;
Qent ma quitaïn ar vro-mâ me evoc'hoas boutaillat.
Me eo Molarge, va mignon, hac a gar ar blijadur,
Evit dansal hac ebatal, ober cher-vat dreist muzur.

AR C'HORAIZ.

Te harlant evel ur brutal, den milliguet ha barbar !
Te a zo ur monstr infernal, digasset var an douar ;
Capabl e zout da revina hac ar vro hac ar c'hanton ;
Calz a dud o senti ouzit a ra o daonation.

MOLARGE.

Sonjal a res dre da gomzou donet aben d'am sponta,
Mes me zo un den, va mignon, dichagrinus a bep tra ;
Me a zo un den, va mignon, a laqa an dud contant,
Au noblanc hac ar vourc'hisien, ar gomun ha tud yaouanq.

AR CHORAIZ.

Ret eo lavaret, va Doue, e zeo bras ho madelez ,
Pa bermetit gant ur seurt den qement fallagriez.
Nedoc'h qet un Tad venjançus, o souffri gaut ar pec'her ,
Bete ma têu doc'h insulti en bo Temprou , va Zalver.

MOLARGE.

Comanç a ràn d'en em nec'hi, o velet'ranqân quîtât
 Va slijadur ha va cheriou bremâñ vit ur pennat-mat;
 Racse eu em divertissomp gant calz a gontantamant,
 Rac var ben un nebeut amâñ hor bezo sur chenchamant.

AR C'HORAIZ.

Penos eta, den insolant, den milliguet ha barbar,
 Ne veles-te qet exposet Jesus-Christ, Roue ar gloar?
 C'hoas e c'heus an iffondiri, den aheurtet hac ingrat,
 Da zont bemde d'en offanci dre bec'hejou execrabil!

MOLARGE.

Ro-te peoc'h dìn-me Coraiz, ne qet deut c'hoas va zermen;
 Va ben un nebeudic amâ e vez grêt pinijen.
 Amzer avoalc'h o de'o an dud er spaç eus a zeiz sizun
 Da zont da zebri souben dreut d'ober pinijen ha yun.

AR C'HORAIZ.

Mab Doue an Tad Eternel zo eus an ên disqennet,
 Hac a zo en em incarnet bars ar Verc'hes beniguet,
 Pehini zo bet en dezert an nombr a zaou-uguent de,
 Evit delivra'r bec'herien demeus a gaptivite.

MOLARGE.

Guell e ve dide, Coraiz treud, studia da sarmoniou,
 Rac bete Merc'her al Ludu me en em divertisso
 Assambles gant va mignonet, pa zomp-ni en em gavet:
 Qen a vo deut an amzer-ze, ni rayo frico bepret.

AR C'HORAIZ.

Poent e cavàn did, Molarge, achui da gomplimant,
 Rac var ben un nebeut amâ e sono cloc'h ar guær-mâñ.
 Qementse a zisquez ervat e zout un den disfêçon,
 Pa ranquer dont das chasseal eus ar vro hac ar c'hanton.

MOLARGE.

Ma viges-te deuet en deiz evel ma zout deut en nos,
 Me raje dide discampi ha na pige qet repos;

P'òn em brassa contantemant hac ebars em plijader,
Out deut da droubli va speret, den cruel ha dinatur.

AR C'HORAIZ.

Men'òn qet certen dinatur, er c'hontrel da guementse,
Mes deut ez òn das chasseal demeus ar vro; Molarge,
Dre ma zout un den ignorant, carguet a impurete,
Ez òn deut vit das c'hasseal demeus abers un Doue.

MOLARGE.

O na pebez tristidiguez a zo ebars em c'halon,
O velet e ranqàn quitat tud ar vro hac ar c'hanton!
Adieu eta, va mignonet, an oll generalamant;
Bremàn e ranqàn ho quitat gant calz eus a nec'hamant.

AR C'HORAIZ.

Nous'en birviqen, va Doue, avoalc'h ho trugarecât;
C'houi zo un Tad carantezus, atao favorabl ha mat;
Va speret a zo contantet, rejouisset va c'halon,
Pa meus chasseet Molarge eus ar vro hac ar c'hanton.

Ha racse eta, va zud qèz, breman' n'em gconvertisset,
Ha distroit varzu Doue gant ur garante barfet;
Tostait d'ar Sacramanchou, ha deut d'ober pinijen,
Hac e viot recompanset gant Doue da virviqen.

Me ho supli, oll Gristenien, demeus a greiz va c'halon,
Da zont da imita Jesus ebars en e Bassiou;
Caromp Doue a greiz galon, hac en deiz coulz hac en nos;
Ennes eo sur ar güir voyen da c'honit ar Barados.

FIN.

E Montroulez, e ti LÉDAN, e traon ru ar Vur.